

PESK FRESK ... PESKED BEO ...

"Cockles ans Mussels",
kanaouenn iwerzonat, lakaet
e brezoneg gant

KERLANN.

I

E-barz kêr Konk-Kerneo,
'lec'h ez eus merc'hed brao,
me a zeuas da garout Marianna Sanseo,
hag a-drenv d'he c'harrigell
e youc'he en avel:
Pesked fresk, pesked beo ...
prenit, emaint beo ...

An holl:

Pesk fresk, pesked beo ... pesk fresk, pesked beo ...
pesked fresk, pesked beo ...
prenit, emaint beo ...

II

Gwerza a rae pesked
d'ar baotred, d'ar merc'hed,
rak ze ' oa bet micher he mamm hag he zad,
hag a-drenv o c'harrigell
e youc'hent en avel:
Pesked fresk, pesked beo ...
prenit, emaint beo ...

An holl adarre

III

A-daol-trumm e klanvaas,
eun devez e varvas,
ha ne youc'has mui ken Marianna Sanseo.
Hogen^{pa} selaouer
eo hanval e klever
war straed (I) kêr Konk-Kerneo
he mouez o kano (2):

Pesk fresk, pesked beo ...
pesk fresk ...

An holl adarre da echui:

"Pesk fresk, pesked beo ..."

ECHU EC

(I) ar straed = ar ru
(2) (yez Kerne) = o kana